

CANTIC

VOAR

VUE AN AUTRO SANT GONERY,

Pehini en deus e Chapel hac e Relegou en parons Plougrescant

Voar un ton nevez.

Roue ar sent, salvoer ar bed,
 Reit din ar c'hraç hac ar speret
 Da disclerian da bep hini
 Ar vue a sant Gonery.

Disquin a ra dimp eze ret
 Casout ol vaniteo ar bed,
 Divoal ouz ar pez a ouffe
 Hen laquat in diouc graç Doue

Disquin a ra dim-ni ouспен
 Eze ret ober pinigen,
 Hac a guir galon pardoni,
 Hac ober vad d'hon innemi.

Sant Gonery a voe ganet,
 En bro soz, ha bet groet belec,
 Eou den fur voa, eun den savent,
 Leun a vertuiou excellent.

Maes evit ma vigé parfait,
 Gant Doue a voe inspiret
 Da distribuin he vado;
 D'ar bévien, ha quitaat ar vro.

Sant Tual voa abat neuse,
 Deus eur gouënt er hontre-se
 Laret voa desom gant eun ael
 Dont da bresec en Breis-lzel.

Sant Tual a aboissaz
 Gonery gantan a deuz,
 Ouspen dec al ha triquent,
 Pere ol goude so bet sent.

Pa ouent en hot disambarquet,
 Sant Gonery en bro goinet
 A sav un hermitage bian
 En coat Bringuilly tost da rohan.

Piv-ouffe biquen raportin
 Pez santelez a voa henni,
 Eun den voa leun a garante,
 Evit Doue hac he hente.

De a nos et voa en peden,
 Evitom hac ar bec'herien.
 Douç voa, chast a mortifiet,
 In he gorf, hac in he speret.

Tretin re he gorf hep true,
 An douar yen oa he voële,
 Et voët a voa bara ha dour,
 Pa oa red mad in eum sicour.

Dré exemple he voe santel,
 He bedennou continuel
 He gomsou, et instruction,
 He convertissas ar hantog.

Eun digentil a voa hanvet
 Alvandus, den superb meurbet
 Eun de o tont deus ar chasse,
 A saludaz an den Doue.

Ar sant a lere he offiç,
 Ha n'en remarquas a nep guis,
 Ar pez en istant a laquaz
 An autrou en eur goler vras.

Piv, emean, eo an ignorant
 Quen fier, a quen insolant
 Nem salud quet pen saludan,
 M'em beso raëson anesan.

He senechal a voa gantan,
 A deuz da respont dezan :
 Eur belec eo, eun den santel,
 A so deut aman diabel.

Meur miraclo braz en deus gret
 Abaoue ma eo aman rentet.
 Ne baouez da bidin Doue
 Evit an dud deuz ar honre.

Maez ar homso ma na oant quet
 Capabl da dousaat he speret,
 Daou deuz et dud gand coler vraz,
 Da bilat ar sant a gassaz.

Pa oe arri an dud mechant
 Ebarz en hermitach ar sant,
 Saillat a rejont voarnean,
 Evel bleydi, evel chaz clan.

Discaret oue, a quen ruillet,
 A doliou treit, a bahateet,
 Ma torjont diou eus he gosteon,
 A ma chomas en rez maro.

Ar senechal a aruaz
 Pa voant en eur fureur quen bras,
 Hac a eure dese cessin,
 De bilat, a de goal tretin.

An den ma a dosta dean
 Hac a sant c'hoaz bue ennan,
 Hac a groc ennan gant true,
 Evit he sevel a c'hane.

Ar sant savet voar he daoulin,
 A bed ar vajeste divin,
 Da bardonni de bourrevien,
 Ha da rein dese sclerigen.

Incontinant (tra estonnuz)
 O daou int rentet malhurus,
 Hep comps, hep querzet, hep goelet
 Ho faç var c'houc ha c'hil troch.

Ar senechal leun a eston,
 O voëlet ar bunition,
 O voëlet un dra quen estonnuz,
 A ya da gavet Alvandus.

Alvandus o veun clevet
 Ar miraclo a voa c'hoarvezet,
 Ha ya gantan hep differi,
 Da hermitach sant Gonery.

An autro, pa oel guemen-man.
 A spont, hac a deu da grenan,
 A ya dan daoulin da bidi,
 Ar sant da dont d'ha fardoni.

Ar sant neuse ouz ho guëlet,
 Ozri d'an doulin prosternet,
 A bed Doue d'ho fardoni,
 Hac a gommanç d'ho instrui.

Payanet oant, idolatret,
 Nanafoant quet Salvoer ar bed,
 Nac ar guir Doue pehini
 A dle pep den da adori

Goude o besan instruet
 He rentas dese ar yec'het
 Rein a eure de badeiant
 Hac o rentaz ho zri contant.

An autro a bed Gonery
 Da dont gantan da chom de dy,
 Deut guenin emean autrou,
 Disposet deus ma oll vadou.

Mes ar sant a laras dezan
 Eet d'ho ty me chomo aman,
 Me a vevo en paourante,
 En pad ar rest deus ma bue.

Ar brud a yes en ber amser,
 Dre ar vro oll hac ar c'hartier,
 Deus eur miraclo, quen estonus,
 Arriet gant tud Alvandus.

A bep tu e teuer de gavet ;
 Tud clan evit cavet yechet,
 Re all evit dont de bidin
 Da dont ar fe do instrui.

Eur vech he voe supliet
 Da laret ofera eun euret
 Hac ar sant dre charite
 A gonsantaz da guemen-se

Ar min auter voar behini,
 Ma teue ar sant da celebrin
 En devoa de souten hepquen
 Dindan e greiz eur pilier min.

Pa voa er gonsacration
 En he brassan devotion,
 An drouc-speret en he goler,
 A dor dre el greiz an auter.

Mes dre verito bras ar sant
 An auter a chomas constant,
 Hep coean hac hep trebuchin
 Evit-an da dont da derrin.

Evit-an da vean torret
 Voar ar pilier e chom bopret,
 Tost dar forest a Brenguilly,
 En memoar da sant Gonery.

A sant braz ma desire,
 Conversin hep brut gan Doue,
 Hac a garj ne oelje den
 Evit guel ober pinigen.

Rac se gand Doue inspiret
 He quita escopy goënet,
 Dont a ra da hini Treguer
 En Plougrescant eo choaz he guer

Eno en deus convertisset
 C'hoas nombr bras eus a baianet,
 Dre vertu e vue divin,
 He viraclo hac e doctrin.

Eno he savas eur chapel
En honor d'an dreindet santel
Eno er fin eo decedet
Hac' eno'e gorf interet.

Er chapel man ennan bepret
He benn, he diou vrech biniguët,
A cals boas deus e relego,
Eun tensor bras et heo er vro.

Daou bardon so en he chapel
Unan'ar hentan meurz ebrel,
Dar bevaret sul goueren
Et ye an eil dar bopl christen.

Queit a ma oa ar sant er bed
Hac a baoue ma eo decedet,
En deus great cals a viraclou,
En andret tud a bep sort bro.

Ous pep sort clenvet en peder
En pep annui, en pep danger,
Mes special ous an droucq pen,
Hac ouspen vit pep sort derrien.

Mar queromp dont de emitan
O carout ar bed eveltan,
Ha pardonna an injuriou
Ezomp certain en hon harou.

Hac o besan caret gantan
Goulenomp pep mat digantan,
Hac et teuio da obteni,
Et vennat evet pep hini.

Sant Gonery c'hui so evurus
Goude ho pinigen poannius,
Obtenet dimp oll pec'herien,
Ar c'hras da ober pinigen.

Ha goude oll bean caret
Evel d'hoch Doue voar ar bed
Ma hefomp goude hon bue
Da repos en eternite.

MISSIONN ANN TAD ROT (Ebrél 1856.)

Var ton : *Santez Mari.*

Laret en deuz bet d'imp-ni
Adori eunn Doue ;
Hen-nez e ven na'doui
En deuz laret ive.

Ann hano ze zo santel,
Santel, santel meurbet ;
Ann hini zo'he vugel
Hen laro gant' respet.

Ar zuliou hag ar gweliou
A virfet war o c'hed ;
Evit serviji Doue
Pep tra a zilesfet.
D'ann ofern, d'ar gousperou
It holl enn deizou ze
Diouc'h ar gwel blanedennou
Ho miro ar re ze !..

Pa zefet d'ann ovisou,
Pa lerfet ho pater,
Lezit ven soujesonou,
Sellet ouc'h ho Salver ;
Grit bepret eur *beden wenn*,
Lezit ann hini zu,
Ma n'hoc'h euz c'hoant da leski
Da vikenn e tan ruz.

Doujet bepred d'ho tadou
Ha d'ho mammou ive,
Heuliet ho holl lavarou
Selaouit anez-he ;
Kossoc'h e-zint evidoc'h
Meur a dra 'deuz gweled,
Pleget ho imor kentoc'h :
Ne larfont drouk e-bet.

Ar mevel braz na zentaz
A ziskaraz ar c'har ;
E-nep gweach na selaouaz
He vestr, he zalc'her kar ;
Sentet bepred, kristenien,
Sented a galonn vad
Hag o pezo sklerijen
Vit c'heulia ann hent mad.

Diwallit diouch ar pec'hed
Hanvet buanegez :
War ho nesa na skoit ket,
N'henn disprizet james :
Ha pa vec'h e koat-ann-Noz
Cuzet a beb lagad,

Arserien ar baradoz
Ho kwelo c'hoaz ervad.

Lezit net al ligentez,
Eur pec'hed louz meurbet,
Pedit aman ar Werc'hez
Pa viot-hu tentet ;
Dilezit ar veventiz,
Kompagnunaeziou fall,
Serret ho taoulagad piz
Ne-dit ket da zansal.

Diwallit c'hoaz da *voulc'ha*
An traou na n'int ket d'ec'h
Er bed-al eo ret stoufa
Ann toullou ze gant bec'h.
Doue hor lezo er bed
Eur pennad bihan c'hoaz,
Mes dre holl e vezo ret
Lakaat pep tra ne flas.

Lezit gewier a gostez
Ar wirionne keret ;
Pa oac'h gweach-all bugale
E zo d'eoc'h lavaret .
N'en deuz ket netra gwasoc'h
Evit ar gwall deodad,
Mervel a glesac'h kentoc'h
Hag e rafac'h ervad.

Ne laksit ket ho spered
Da sonjal e traou vil ;
Pellait diouc'h ar pec'hed
Hon laka *inutil*
E-touez bugale Doue
Pa vend o labourad
E gwinienn ann tad mad-ze
Zo sklear he zaoulagad.

Ne viret diouc'h ho nesa
Netra diouc'h e vado,
Kement ho po digant-ha
A baefet mad ato ;
Na c'hoantaet ket morse
Ann traou na n'int ket deoch :
Eunn den hag a gar Doue
Ne vir netra hep leac'h !..

Mont a refet da govez
Eur veach-e pad ar bloaz ;
Ma *ne-dit* ket aliez
Da basq da vihana

E resefet ho Salver
Gant gwir *devotion*
Evidoc'h ez eo tener
Goulet out-han pardoun.

D'ho kovezour e rofet
Krok enn ho pec'hejou ;
Ho *divega* na refet,
Tennet ho holl *griou*.
Goulennet digant Doue
Eur veach c'hoas ar c'hras
D'ho devi eno neuze,
Ha, pep tra enn he flas !..

Neo ket awalc'h d'imp senti
Bugale, diouc'h hon tad
Diouc'h hon mamm, hep diferi,
Sentomp, sentomp dalc'h mad.
Yunomp pa deui d'hen laret,
Ha ne zebomp morse
Ann traou he deuz divennet
Lezen zo enn dro d'he.

Dougit bepred gant respet
Hac'h abjou bihan,
A c'harzo ann drook speret
A c'harzo mad out-han ;
Pa c'hoantaio hon lakaat
Da goueza er pec'hed,
Kombatomp gand-han timad
Hag he vo gouneet.

Yaouankiz, war eun daolen
Ho hano zo skrivet,
Miret evit ho kelen
Mamm an holl gwerc'hezad.
Ra viot kristenien barfet,
Servijet mad Doue
E baradoz, ann eled
E n'em welfom goude.

Kenavo, ma mignonet,
Kenavo er joaio ;
A dra wir d'war ar bed
A raok d'eoc'h me ielo :
Buez eur missionner
Sionaz ! ne bad ket pell ;
Pedet vit-oun, ma breudeur,
Doue, he vamm santel !

KEN.

I.-M.-I.